



D'ar Gwener vintin-se, 14 a viz Nisan, deroù miz Ebrel kalander ar Romaned, ha klozet e kelc'h he ramparzhioù, e tihune kêr Jeruzalem dindan kentañ flouradennoù heol an nevezhañv a skuilhe e sklêrijenn war douar an Hebreed. Derc'hent gouelioù Pask e oa, Pesac'h ar Yuzevien, lidet bep bloaz d'ar 14 a Nisan, da-geñver nozvezh al loargann. Degas a rae Pesac'h d'ar bobl koun eus mare an Ermaeziadeg, dieubidigezh hendadoù an Hebreed pa guitaas ar re-mañ Bro-Ejipt, kantvedoù a oa, bleniet gant ar profed meur Moizez, hervez m'eo skrivet e levrioù an Tora, e penn-kentañ ar Skritur sakr.

Unan eus brasañ gouelioù ar bloaz e oa Pesac'h, hag a bade eizhtez, peogwir e kroge antronoz gouelioù sizhun ar bara-dic'hoell a verke penn-kentañ eostoù an heiz. Setu n'eo ket souezh ma veze, da neuze, Jeruzalem o virviñ gant ur mor a dud, pirc'hirined hag a ouie dont, a-viliadoù, da gemerout perzh el lidoù relijiel hag er c'hinnigoù sevenet war aoter al loskaberzhioù, e porzhioù Templ ar gêr santel.

Met, petra bennak ma verke Pesac'h mare dieubidigezh an Hebreed diouzh o stad a sklavelezh, gwechall-gozh, e bro ar Faraoned, ne oa ket mui, d'an amzer ma komzomp

anezhi, pobl an Hebreed en he frankiz. Dindan gwask chadennoù an estren edo ar bobl en-dro. Ar Romaned eo a oa deuet da vezañ mistri er vro goude m'en doa, tost d'ur c'hantved a oa, ar jeneral roman Pompeius astennet, dre nerzh pilum e lejionidi, beli Kaezared Roma war broioù ar Reter-Nesañ, tro-dro d'ar Mor Kreizdouar.

Met, tud poellek a veze koulskoude eus impalaered Roma. Daoust dezho da vezañ mestr, dre hanterouriezh o gouarnourien, war ar broioù bet gounezet ganto, fur a-walc'h e vezent memestra evit lezel ar pobloù trec'het da azeuliñ doueoù o bro c'henidik ha da genderc'hel, didrubuilh ha dinec'h, gant lidoù o relijion.

Setu d'an devezh-se, derc'hent nozvezh loargann ar 14 a Nisan, penn-kentañ an nevezhañv, e c'hellje ar Beleg-Bras lakaat aberzhiñ, evel bep bloaz, war aoter Templ Salaun, oan Pesac'h an dieubidigezh dindan eskell gwarezus ar *Pax Romana*. Hag e vije, war tachenn ar vuhez relijiel, sevenet al lidoù sakr, e koun eus mare an dieubidigezh, evit brasañ gloar Yahweh, Doue Abraham, Izaak ha Yakob, penndud hendadoù an Hebreed.

War tachenn ar vuhez foran, koulskoude, ha diwar an doare ma veze meret ar vro, ne dae ket ken plaen-se an traoù. Kabestret e oa bet ar Yuzevien. Ne oa bet lezet ganto nep gwir na frankiz. War an dachenn-se, ez eo ar Romaned a oa e penn ar jeu. Ganto eo e oa pep galloud war ar pezh a denne d'an arme, d'ar polis, d'ar justis, d'an tailhoù ha d'ar velestradurezh dre-vras. Un drevadenn e oa deuet douar an Hebreed da vezañ, na petra 'ta, ken en em c'houlenne lod eus ar Yuzevien hag-eñ ne oa ket bet disoñjet gant Yahweh ar bobl bet dilennet gantañ hag ar bromesa en doa roet d'an ozhac'h-meur Abraham ha d'ar profed Moizez ?

Ha posupl e vije bet ? Diaes er c'hrediñ koulskoude pa soñjer, evel ma kaver er Skritur, en doare m'en doa Doue galvet Abraham ha kemennet dezhañ e teuje da vezañ, dre e ziskennidi, tad d'un niver bras a vroadoù, hag e vije ivez anezhañ ur stivell a vennozhioù evit an holl vroadoù. Ha daoust hag-eñ n'en doa ket graet Doue koumanant gant Abraham dre berzhioù un emglev a badfe da viken ? Un emglev bet adnevezet c'hoazh, e-kreiz dezzerzh ar Sinai, da vare ermaeziadeg an Hebreed eus Bro-Ejipt, pa roas Doue taolennoù al Lezenn d'ar profed meur Moizez. Setu, hervez ar Skritur atav, komzoù Yahweh d'e bobl bodet e-harz Menez Sinai :

*« Diwar vremañ, gant ma sentoc'h ouzh ma mouezh ha gant ma chomoc'h feal d'am emglev, e vezoc'h evidon un dibab a-douez an holl bobloù... Diazezet em eus ho pro etre ar Mor Ruz ha Mor ar Filistined, hag adalek ar gouelec'h betek ar Stêr-Eufratez. Lakaat a rin tud ar vro-se etre ho taouarn ha c'hwï eo o argaso a-zirazoc'h. »*

Deuet e oa o zaol da vat gant an Hebreed. Daouzek meuriad a oa anezho, daouzek meuriad Israel bet savet, e Bro-Ejipt, gant daouzek mab Yakob, mab-bihan Abraham, ha bet lesanvet Israel. Aloubet, gounezet hag annezet e voe ganto an douar en doa prometet Yahweh d'o hendadoù. Kanaan e oa anv an douar-se. Berzh a reas an Hebreed e Kanaan. Brudet-tre e oa bet, war a lenner e-barzh ar Skritur sakr, lod eus o roueed, evel Saoul, an hini a savas kentañ rouantelezh unanet Israel, pe c'hoazh David, an hini a skubas ar Filistined diwar zouar Kanaan hag a lakaas Jeruzalem da gêr-benn ar rouantelezh. E vab, Salaun, an hini a veze lâret diwarnañ “an den fur”, eo a roas lusk d'ar c'henwerzh hag a lakaas sevel, e Jeruzalem, kentañ Templ ar Yuzevien.

Ne badas ket, koulskoude, an oadvezh aour-se. Goude marv Salaun e savas dizemglev etre an daouzek meuriad. Rannet e voe ar vro e div rouantelezh : hini Israel e norzh ar vro, hag hini Yehouda er su. Gwanaet e oa dre an dizemglev-se nerzh-stourm an Hebreed, ken e teuas alouberien da lakaat ar skrap war an dud ha war o madoù. Tro-ha-tro e fardas warno Asirianed ha Babiloniz. Drastet e voe Jeruzalem, diskaret Templ Salaun ha kaset ul lodenn vras eus an Hebreed en harlu war-du ar reter, en tu all d'ar Stêr-Eufratez, e bro an Asirianed da gentañ ha, da c'houde, e bro ar Galdeaned diouzh amzer Nabukodonosor, roue Babilon. Ur skourr eus diaspora kentañ ar Yuzevien e voe peogwir e chomas lod anezho e Babilon da vat, savet ganto un drevadenn war glannoù ar Stêr-Eufratez. Distreiñ a reas an harluidi all da Vro-Ganaan dre m'o doa bet an aotre d'en ober digant Koresh, impalaer ar Bersed, bet aloubet ha kaset gentañ d'an traoñ galloud Babilon.

Adsavet e voe Templ Jeruzalem. Met ne c'hellas ket mui pobl Israel sevel war ar bazenn uhelañ en-dro, na dont da vezañ dizalc'h da vat. Dindan gouarn ar Bersed e oa ar vro hag, evit mont penn-da-benn gant red an istor, n'en doa ket Marc'heger ar brezel, an distruj hag ar marv, echu gant e labour c'hoazh. Gwalleurioù all a zeuas, a-hed ar c'hantvedoù, da waskañ Israel pa 'n em ledas, eus strizhoù-mor an Hellespontos betek an tu all d'ar Stêr-Indus, galloud ar C'hresianed dindan marc'hekadegoù herrus marc'hegerien Aleksandr a Vakedonia. Ha petra bennak ma klaskas an Hebreed en em zizober diouzh gwask ar C'hresianed, da-geñver emsavadeg ar Makabeed, tonket e oa dezho memestra plegañ o chouk da vat dindan ergerzhadegoù didrec'hus

an armeoù roman pa antreas Pompeius, e penn e lejionidi, e kêr Jeruzalem.

Disoc'hoù an aloubadegoù-se a voe eus ar re washañ evit Kanaan. Didroc'het a-dammoù e oa bet ar vro. Eus dezerzh ar su, da vont betek Bro-Siria en norzh, hag a bep tu da draoñienn ar Stêr-Yordan, e oa bet lodennet ar vro-gozh e meur a rannvro vihan ma kaved en o zouez, Idumea, Judea, Samaria ha Galilea en tu kornôg d'ar Stêr-Yordan ha, diouzh tu reter ar stêr, Perea, an Dek-kêr, Bro ar Golan, Iturea ha tammoù all c'hoazh. Dizunaniñ evit mestroniañ gwelloc'h, setu an hini 'oa politikerezh mistri nevez ar vro. Mistri o dorn dir, hag a ouie dont da vezañ didruez a-wechoù pa veze anv da zerc'hel krog war ar pobladoù bet trec'het ganto. « Gwa d'an drec'hidi : *Vae victis !* » a oa bet lâret ur wech, kantvedoù a oa, ouzh ar Romaned gant Brennos, ur penngadour Kelt, bet aloubet ha kemeret gantañ kêr Roma. N'o doa ket ar Romaned ankounac'haet ar gentel. Setu evit derc'hel o c'hrog e veze diskaret ganto renkadoù uhel ar pobladoù kouezhet dindan o galloud, ha toullbac'het, kaset d'an harlu pe d'ar marv ar pennadurezhioù a grede enebiañ ouzh Kaezar. Anvet e veze en o lec'h, evit merañ ar servijoù foran, kenlabourerien doujus evel paotred an tailhoù, pe kargidi all hag a ouie soublañ didrouz ha diglemm livenn o c'hein. Troniñ a rae e penn ar rannvroioù prefeded sentus-tre ouzh impalaered Roma evel ma oa, d'ar mare ma komzomp anezhañ, eus Pontius Pilatus, gouarnour rannvro Judea.

Ouzhpenn bezañ kollet ar galloud politikel, e oa bet lakaet ivez en arvar unaniezh relijiel ar bobl. Mar boa bet, da heul an aloubadegoù, harluet meur a wech mibien Israel, hag aet ar re-mañ da glask repu e-touez

trevadennoù an diaspora yuzev strewet er bed gresian-ha-roman, ne oa ket chomet douar Kanaan didud evit se. Deuet e oa, a-hed ar c’hantvedoù, enbroidi gant o ziegezhioù hag o c’hredennoù relijiel d’ober gwrizioù war lodenn-mañ-lodenn eus bro gozh Israel, pa ne oa soudard ebet mui oc’h ober ged hag o tiwall harzoù ar vro. M’he doa rannvro Judea dalc’het da feiz he hendadoù gant he foblad yuzevien a orin gozh, tud sentus ouzh Lezenn Moizez, ha reut en o c’hredennoù tro-dro d’al lidoù sakr sevenet gant beleien an Templ e Jeruzalem, gant pobladoù Samaria ha Galilea ne droe ket ar bed er memes mod.

Abaoe ar c’heit ma oa bet riñset, gant an Asirianed, meuriadoù Israel a-ziwar douar Samaria, ne oa eus ar Samaritaned, war a soñje d’ar Judeaned, nemet estrañjourien didalvez deuet ne ouie den re vat a belec’h. Ne oa ket anv a zarempredoù etre an daou rummad tud-se evel-just. Ne dostae ket ar Samaritaned ouzh Templ ar gêr santel ha, gwashoc’h c’hoazh, savet e oa bet ganto un templ dezho o-unan war lein Menez Garizim a gase, diwar e nav c’hant metr uhelder, skeud e dolzenn a-us da gêr Sec’hem, kêr-benn Samaria. Tamallet e veze ivez ouzh ar Samaritaned da saotrañ, gant falskredennoù, al lidoù a ginnigent da Yahweh, Doue Abraham, setu e vezent lakaet da eretiked gant ar Judeaned. Hervez ur c’hrennlavar a veze klevet alies da neuze : « Un tamm bara roet gant ur Samaritan a oa lousoc’h eget un tamm kig moc’h ! ». Biken n’en dije un den a Judea lakaet troad ebet e Samaria, stlepet e vije bet mein outañ ! Evit mont eus rannvro Judea da rannvro C’halilea, ha chom hep kerzhout gant hentoù Samaria, e ouie an dud ober an dro dre an tu reter d’ar Stêr-Yordan.

Annezidi Galilea, e-barzh an norzh da zouar Kanaan,

e oa ivez anezho Hebreed a wad mesket, diwar bobladoù deuet a lec'hioù all : Asirianed, Babiloniz, Persed, Itureaned, Gresianed. Tud chichantoc'h eget ar Judeaned e oant, tud o spered digor na petra 'ta, hag a zegemere ar vuhez war he zu mat ken e tarzhe buan ar joa-bevañ en o metoù. Gwir eo e oa ivez eus lodenn izelañ douar Galilea, gant he bodadoù gwez, he zachennadoù glasvez, he gwazioù dour-red, he farkeier dindan edoù hag he gwiniegi, ur bastell-vro strujusoc'h, glasoc'h ha dedennusoc'h eget na oa eus Judea gant he c'hein-douar torosennek, he zorgennoù meinek hag he fikernoù krin, hep disoñjal an dezerzh ! Dezerzh Judea, e traoñ ar vro, sko ouzh bord ar Mor Marv, anvet c'hoazh ar Mor Sall. Chomet e oa koulskoude ar C'halileaned, dre o sevenadurezh, tost ouzh ar Judeaned. Dalc'het o doa ivez ouzh gourc'hemennoù al Lezenn roet d'ar Yuzevien gant Moizez ha heuliet e veze ganto, da-geñver ar gouelioù-berz, al lidoù sakr sevenet en Tempel e kêr santel Jeruzalem.

Petra bennak ma ne veze ket kudennoù ekonomikel a-bouez dindan dalc'h politikel ar Romaned, ne oa ket spered Israel en e vrud wellañ memestra. Boazet e oa bet ar Yuzevien da vevañ, a-hed ar wech, en o fart o-unan ha diazezet ganto o c'hevredigezh war pennaennoù o relijion undoueeek. Met abaoe mare Aleksandr a Vakedonia, e veze intret o sevenadurezh gant doareoù-bevañ nevez. Degaset e veze kemmoù er vro ha lakaet e veze en arvar an dibarelezh yuzev. An arameeg, yezh o hendadoù, a oa o vont war-gil, dreist-holl e-barzh ar c'hêrioù hag ar porzhioù-mor, peogwir ez eo ar gresianeg a oa deuet da vezañ yezh an eskemmoù kenwerzhel, ar velestradurezh hag ar servijoù publik. Betek ma oa bet troet ar Skritur sakr e gresianeg ! Mard e vije bet c'hoazh evit Yuzevien

an diaspora hepken met, war a veze kontet, bez' e oa ivez skribed, e Templ Jeruzalem, hag a lenne ar Skritur sakr e yezh Sokrates ! Setu dont a rae a-nebeudoù memestra ar sevenadurezh gresian-ha-roman da c'hounez tachenn, da grennañ ha da vountañ war ar sevenadurezh yuzev.

Ar Romaned, int-i, ne oant ket bet seizhdaleetoc'h evit gouzout penaos tennañ o mad diouzh ar vro ma oant deuet mestr warni. Setu kouezhet e oa bet tailhoù nevez war chouk Shemouel gouer pe Shimon galvez evel an *tributum soli* war an eostoù, an *tributum capitis* war an dud, ar *portorium* war ar marc'hadurezhioù treuzdouget a lec'h-mañ da lec'h-all, hep disoñjal an tailhoù war an hollen, an anerioù hag an taosoù paeet evit magañ ar soudarded roman herberc'hiet e-barzh ar vro.

Bez' e oa lod eus ar Yuzevien, koulskoude, hag a ouie dirouestlañ o neudenn gant mistri nevez ar vro. Kenlabourerien, na petra 'ta. Bez' e oa anezho dreist-holl tud ar renkadoù sokial uhelañ, ma kaved en o zouez ar foñcherien, perc'henned vras anezho, pe c'hoazh izili ur vrientinelezh relijiel, hini ar Sadukeaned e oa, hag ivez kargidi koumanantet ouzh ar Romaned evel paotred an tailhoù, Publikaned a veze graet eus ar re ziwezhañ-mañ. Tra ma veze ar genlabourerien-se oc'h ober lagad flour da gannaded Roma, e veze dirusket, a-hend-all, chouk ar vro gant koad kalet yev Kaezar. Diwar gwad mibien Israel eo en em vage kêr Roma. Ne veze ket prenet ar *Pax Romana* gant daou Diner toull, setu.

Penaos 'ta neuze e vije deuet pobl Israel da benn a sevel he c'hein en-dro ? Ha chomet e vije bet c'hoazh dindan ludu rouantelezh David un elfenn a espereñs ? Lod tud er c'hrede. Daoust hag-eñ ne oa ket bet diouganed, gant ar Brofeded Shemouel, Izaia, Yerehia hag ar re all, e

teuje broñsoù nevez da greskiñ ouzh penn-skod Yese, tad David ? Donedigezh ur Mesiaz a droidelle, er mareoù-se, e penn an dud. Skrivet e oa bet, hag embannet e-barzh ar Skritur, e teufe eus lignez David ur pennden, ur c’huzulier, un den fur, an hini olevet gant Yahweh hag a lakfe da ren ar justis hag ar peoc’h. Embannet e veze ivez e-touez ar bobl e vije eus ar pennden-se un haroz a rofe da Israel an tu kreñv war ar broadoù all hag a blantfe an enebourien e-maez ar vro, Romaned hag all.

Kaer e oa gortoz ! Den ne zeue. D’ar mare ma oa Pontius Pilatus gouarnour Judea ha Tiberius impalaer Roma, ne oa ket bet klevet anv c’hoazh eus ar brogarour-se, kuzulier ha den fur, hag a vije bet gouest da adsevel steredenn ar roue David brodet gant neudennoù aour ouzh lien glas-glizin banniel Israel. Setu ma kreske an niver a dud a oa diwar goll pasianted, tud gant gwad dindan o ivinoù hag a embanne ne oa nemet un doare da lakaat ar vro en he frankiz en-dro : ober brezel ouzh ar Romaned hag ouzh an drubarded vrein a genlaboure ganto. Ur stourm kuzh, ur stourm dre zindan e vije evel-just, rak arabat e oa mont da skeiñ ouzh kannaded Roma dindan lagad an holl ha sklêrijenn an deiz. Diwar-se ivez, e oa en em skignet ur rouedad rezistanted dre ar vro a-bezh. Zeloted a veze graet anezho, paotred ar brouskoad, paotred ar mougevioù skoachet e tor ar menezioù, pe c’hoazh paotred an dezerzh, an tolead gouez-se hag en em lede e traoñ ar vro, en tu reter d’ar Mor Marv, el lec’h ma ne blijje ket d’al lejionidi mont da leskiñ kroc’hen o chouk dindan bannoù grizias an heol gor.

Met da ziwall a oa, koulskoude, ouzh kounnar penn-gadourien an armeoù roman. Didruez e oant ouzh ar Zeloted a gouezhe etre o daouarn. Garanet e oa c’hoazh

war spered an dud ar pezh a oa degouezhet, un tregont vloaz a oa, gant bagadoù Zeloted en em savet e Galilea. En o fenn e oa ur brogarour anvet Yehouda ar Galilean, hag anavezet c'hoazh dindan an anv a Yehouda ar Golanad. Genidik e oa ar Golanad eus Gamala, ur gêr gozh ha mogeriet savet ouzh tor un dorgenn, e-kreiz uhelgompezennoù ar Golan, war-hed div eurvezh bale diouzh kostez reter lenn veur Galilea. « N' hon eus mestr ebet nemet Doue e vefe, ha n' en deus Kaezar beli ebet warnomp, » setu ar pezh a ouie embann Yehouda ar Golanad. Bleniet gant ar Yehouda-se, e kasas ar Zeloted o reuz dre ar vro. Trec'het e voe ganto ar gwarnizon roman a ziwallle Seforis, kêr-benn Galilea. Met ne oa ket an emsavid e vit derc'hel da vat war tachenn an trec'h. Chom a reas an tu kreñv gant lejonidi Roma. Lazhet e voe ar Golanad ha chadennet e voe ar Zeloted a oa gantañ. Kaset e voe ar re-mañ d'ar marv, staget ma voent ouzh kroazioù savet, a-gantadoù, war lein an torgennoù hag er c'hroashentoù e Galilea : « *Vae victis*, gwa d'an drec'hidi ! ».

Goude an taol-feulster-se, e chomas ar vro didrouz ur pennadig. Met ne oa ket bet diwriziennet da vat ar gasoni a vage ar vroadelourien ouzh ar Romaned hag ouzh o c'henlabourerien a-ziabarzh bro : Sadukeaned ha tud all uhel-blaset. E tiegezh Yehouda ar Golanad pa ne ve ken, e oa kresket broñsoù nevez ivez dre ma oa bet kendalc'het ar stourm gant lod eus e ziskennidi hag aet ar re-mañ da skorañ an emsav kaset war-raok gant pennoù-bras ar rezistanted. N'eo ket souezh ma veze klevet, bep an amzer, anv eus taolioù-strap stignet ouzh ar soudarded a vac'home ar vro hag ouzh an dreitourien a roe bod dezho. Ha klevet bep an amzer ivez tud all o lavarout : « Sell